

DA VEMOR

An Autrou'n Abat a LANSALUT,

Chaloni eus a His a Itron Varia ar Yur a Vontroulez,

eus a Meaux hae a Guemper.

PERSON GARLAN:

*Maro e Montroulez, an 19 eus a vis Mae 1846, hac anteret an deiz
varlerc'h en Garlan, da bemp heur eus an nós.*



O devez a c'hlac'har ! ne velomp tro-vardro
Nemet tristidiguez var bisach tud ar vro....
An Abat LANSALUT , qen caret gant an oll ,
Allas ! ô va Doue , a râncamp dont da goll !
Na glêver , var ar mèz hac en qér , nep seurt brut
Nemet : Maro eo-ta an Abat LANSALUT !....

Peguer bras niver tud , diredet a bep tu ,
Vardro Sant-Malani , pen-da-ben dre/ar ru ,
A voa en em gavet da vesca o feden
Gant ar c'hàn a varo demeus ar véleyen !
Eun never just e voa dont eno da bedi
Evit eun den qer mad , queuziet a bep-hini.

Pa bartias ar c'horf evit mont da C'harlan ,
E voe heuillet gant calz a vignonet dezan ,
Pere n'er c'huitajont , oll carguet a c'hlac'hар ,
Qen a voe e gorf paour disqennet en douar.
Harp d'an autrou David eo laqet da repos ;
O eneou a zo en joā ar barados.
En em garout a rent evel daou güir vignon ;
Eur vadelez meurbet a voa en o c'halon.
Dorn Doue en devoa e gunduet dezàn ;
Madelez an Abat a voa bras evitân.
Goude beza santet trubuillou eus ar bed ,
Evel eun hiloen e voa en em staguet
Ouz an den generus , pini n'en d'oa qen c'hoant
Nemet da glasq bepret dont d'en renta contant.
Gante o daou e meus bet alies comzet ;
Va c'halon a zanten em c'hreiz joaüs meurbet
Pa deuen da zelaou an eil hac'eguile ,
Hac o velet penaus voa bras o c'harante.

Er güelet hon eus oll , n'eus fors dre bez amzer ,
O tont gant eur soign vrás da gòvessât en qêr :
Nac ar brassa tomder , nac ar yenien vrás
Na eljont en ampech , daoust d'e oll boan , sivoas :
Peur-gontanti an oll a voa e c'hoant vrassa ,
En despit d'e scuisder , alies ar goassa .

Pelec'h cavout eun den quer mad , qen generus ,
Dignoc'h eus ar garg caer a Vinistr da Jesus ?
E blijadur vrassa , c'houi er goar , christenien ,
A voa , en peb amzer , ober vad d'ar beorien .
Na pebes niver tud , en o c'hòvession ,
A recevas outân peb consolation !

Garlanis maleürus ! c'hopi a goll eur güir dad ;
Mes ni ive , allas ! a goll eur mignon mad.

Daou vloas ha trégont zo ho poa-én da Bastor :
Ha c'houi oc'h eus biscoas güelet etal e zor
Ar paour qèz ezomnec , hep beza soulajet
Gant an den venerabl a rāncomp divoeret ?
Atao o receive eguis e vugale ,
Hac o rente contant ha joäüs hep dale.
E féçon d'o receo , quer franc ha quer laouen ,
A laqe anéze d'ancouât o anqen.

Ma vije nep sourci etouez tud e barres ,
E cavet en Abat güir guelennadurez ,
Ha contant da zonet da zenti d'e gomzou ,
En em gavent eürus da heuill e guzulliou.
Mar tigüeje unan e zanvad dianqet ,
Eguis eur pastor mad e rede d'e gavet ,
Hac e comze outan gant quer bras madelez ,
M'en em rente souden da eur seurt carantez .
Biscoas den , a gredan , goude en darempret ,
Na ellas qet mancout da zonet d'e garet.

Ne gredan qet beza biqen dislavaret ,
O credi e vez meurbet dies cavet
Eur Pastor qen carus eguetan birviqen :
Graç déch , Garlanis quer , d'er possedi souden.

Unanet oll hirio en e servich eiz de ,
Demp brémā d'an daoulin da bedi var e ve ;
Trugarecomp Doue , rentomp dezàn enor
D'er beza bet qeit all evit hor güir Pastor ,

Ha pedomp hor C'hrouer ma zayo da repos
Etouez an oll æles en gloar ar Barados.

Miromp en hor c'halon memor an Abat ger;
Ra vo present demp oll atao en peb amzer;
Memor eur Pastor mad zo ger da hep christen:
En Abat LANSALUT hor bo sonch da yigen.

EUR MIGNON COS D'AN AUTROU'N ABAT.

Ma alio des soncte stances fait es festins
Il cestier et le Vingt Sept Dimanche de l'Annonciation
Il cestier des rois et sainte de l'Epiphanie
Il en lausent gitez du Plessis à Châtillon
Pleurez sur brestot nant e telle q's étoile
Qui a comez oculu Basz der priezmeur
Qui en lais estes sonnay q's eut sonz sonnay
Pleurez quu, a telleys, bonz ambeur
Ma selle der mesmeur q's sonnt q's tress

No brestot der pese pidez hizayante
O celi e aveo mesmeur ntre eust
Pur brestot des eustre chastez priezdeur
Qui d'occ', Guignies der, q'st brestot sonnay

L'ameur ou pidez en a seurz q's ob
Tousq' pidez un nivouz en h'z q's ob
soyez nivouz, q'st nivouz